

# AR C'HEMENER

Kanet e Scaër - Even 1910.

♩. = 63 environ.

H. G.



Ar c'he - me - ner n'eo ket eun den; Ne med eur



brou - der laou n'eo ken; Na ve - rit b3 - za en - ter -



ret, Nag en i - liz, nag er ve - red.

Mes plantet 'barz euz zouler-kerc'h  
Oll chas ar barrez var he lerc'h;  
An diveradur deuz ar guc  
Raf dour benniget var he ve.

Ar chemener a zo potr skanv  
Eur potr delikat deuz an traon,  
He dreid zo treuz, he reor zo plad  
Hag he zivisker n'int ket mad...

Ar chemener (1) pa deu en ti,  
Cheton (2) tra 'ra : goul' dijuni;  
Neuze c'houlen digant ar c'hoecg:  
« Pelec'h ez in-~~ne~~ da c'hrouiet ? »

Neuze pa ia var he dorchon,  
Cheton tra 'ra : skrabaat he benn;  
Neuze e lam gant he neuden,  
Hag e trei anei gant he zent.

Pa ia Ian-Gluch divar he neiz,  
A lar an holl : « Aman zo c'houez ! »  
Ha pa vez var leuren an ti,  
I<sup>2</sup> gorn var ho fri.

12

Ha mar 'n euz plijet d'hoc'h ma zon,  
Frealzit breman ma c'halon !  
Evomp eta beb a daken  
Da iec'hed markiz Lipneuden.

(1) Chemener 'vit: c'hemener. (2) Cheton 'vit: kenta. (3) Diboa 'vit: abaoue. (4) Dihueon 'vit: diveza.

Pa ia Ian-Gluch d'ar pardonioù,  
Ve leun he c'hod a veskennoù,  
'Vit ma laro merc'hied yaouank:  
« Ar chemener an euz argant. »

Eun devez ar mestr kemener  
O labourat da Zagober  
A gavaz *par chance* al laouen  
Var dilhad ar Roue kristen.

Eb marc'hata ar chemener  
A droc'h al laouen dre 'n hanter;  
Ha kercent 'n em lak' da lipad  
He viltron ruiet gand ar goad.

Setu aze en he zoursen,  
Guir noblanz ar gemenerien.  
Rag, diboa (3) a lar an dud fall:  
« Setu penoz o deuz goad royal. »

Dihueon (4) kemener a veliz,  
E oa diouz ar groug e Paris,  
Ma fell d'hoc'h diskrouga al laer,  
Boutit ho fri e toul he r... r.